

Ar Pillhaouer

DISKAN

*Foei, foei, foei d'am zammik Aot
Gant e stoup hag e bilhou!*

Ma zad en deus va dimezet
Da eur flerius pillhaouer ; (*bis*)
En Lokeffret ez eo ganet
E komanant Toul-al Laer.

An devez warlerc'h e eured,
E oa foar e Landerne,
Ha ma lapous, prim dihunet
A ya 'r meaz eus e wele.

Drailha ra eun hanter Bater,
Tana ra e gorn butun ;
Diskrouga ra e grog-poezer ;
Setu hen war hent Sizun.

Pa oa an hanter-noz sonet
En iliz vras ar Fouille,
Me oa intanvez glac'haret
Ma unan 'bars ma gwele.

Mont a ra d'ar vilin-paper
Gant eur zac'hadig pilhou,
Kalz buhanoc'h evit eul laer,
Rak preset eo an daelou

Pa'n deus kavet kamaraded
Ebarz eun davarn bennak,
Meur a vanne en deus evet
'Vit lakat e gof distag.



Ha pa zistro d'ar gomanant,
Raktal e sav eun tamm krog :
E pelec'h eo ét da arc'hant ?
Me gred emaint en ez kof !

Ma Yannik pa 'z a d'ar foariou,
A ve dalc'hmad mezo dall,
Tost e oa da goll e vragou,
En Montroulez, an de-all.

Ma Yannik a zo eun otrou,
E dog war goste e benn,
Ha mar sellfec'h ouz e vragou
E wellec'h tam e groc'hen.

Pa ve pignet war e azen
Etouez e dammou pillhou,
Evel eun impalaer romen
Ez eo berr en e gomzou.

Pa zeuio ar c'hiz er vro-ma
Da derri an dimeziou,
Me a ielo, en eur gana,
Pell deus potred ar pilhou.

Pa zeuio karrig an Ankou
D'ober e dro er vro-ma,
Me a gerzo war e roudou
Hag e bedo d'hen samma.

Pa'z ai an Ankou da rida
Toull va flerius pilhaouer,
Me ziredo d'hel lavaret
E komanant Toull-al-Laer.

Red vo komz d'an otrou person
Eus ar paour kez pilhaouer,
Wit ma kano al Libera,
Hag, ouspen, al Lip-e-rer.

